

KANTIK AR VADIZIANT

savet evit gouel an 3 a viz Eost 1913

E ILIZ PLOUEZOC'H

Var don : *Guir vugale ar Vere'hez. N^o 67 bis.*

I. Madoberou ha promessaou.

Pa zeuas an dour zantel da redek var hor penn,
Pa oue skrivet hon hano var roll ar gristenien,
Eur youc'haden a gounnar en ifern oue laosket
Hag eur c'han a levez er baradoz klevet.

DISKAN (1) :

*Nevezomp a greiz kalon hor promessaou santel,
Ha startoc'h eget james ra vimp dezho fidel ;
Evel an daou genvroad a henoromp hirie,
Greomp brezel d'an drouk-spered ; bezomp holl da Zoue !*

Arok ma oamp bet goalc'het e dour ar Vadiziant,
E poueze varnomp, siouaz ! galloud an arouant ;
Azalek an deiz euruz ma 'z omp bet badezet,
Dioc'h he skilfou didruez ez omp bet diframmet.

Ne oamp mui, ac'houdevez, maro dirag Doue,
Na da viken kondaonet da zioueret an Ee.
Setu eur vue neve roet d'hon eneoù,
Setu digor evidomp guir hent bro an envou.

(1) DISKAN (evit deiz ar Pask kenta solanel) :

*Nevezomp a greiz kalon hor promessaou santel,
Ha startoc'h eget james ra vimp dezho fidel ;
En deiz kaer-ma unanet, holl gant eur vouez nerzuz,
Kriomp : « Brezel da Zatan ! Karantez da Jezuz ! »*

Da zevez hor badiziant, hon ençou goåle'het
Dre eur c'hraas dispar zo deut demeuranz an Dreinded :
Deut omp bugale Doue, guir vreudeur da Jezuz,
Templou ar Spered Santel. O pebez stad euruz !...

Da zevez hor badiziant, « karakter » ar c'hristen
Zo bet var hon ençou moulet evit biken :
Merk a henor evidomp, mar gonezomp an Ee,
Merk a vez, a zishenor, mar kollomp hon ene.



Da zevez hor badiziant, oue græt en hon hano
Diou bromessa solanel a dleomp miret ato.
Vidomp e oue promettet trei kein d'an drouk spered,
Hag heuilla, hed hor bue, Hor Zalver beniget.

Siouaz deomp ! re aliez hon euz torret hor ger ;
Nag a vech omp bet dizent ouz mouez Hor Zalver !
Nag a vech hon euz heuliet ha Satan hag ar bed !
Ah ! d'hor ger hiviziken, d'hor ger ne vankimp ket !

II. Men-font iliz Plouezoc'h.

Ama oue, amzer guehall, badezet eur bugel
A dlie beza, eun deiz, belek, eskop santel.
'Pad seitek vla e poanias Fransez an Achiver
Da vleina eskopti Raon ha da veza he skouer.

E renk an holl vugale bet ganthan konfirmet,
Unan zo, dreist ar re all, anavezet, karet ;
Hennez eo an Tad Maner, missioner santel,
Hanvet gant he genvroiz Abostol Breiz Izel.

Var gaïerou hon iliz, e kaver merket c'hoaz,
Eun hano karet meurbed, ha guehall brudet braz :
Frêr Loïz a Vontroulez, euz a Urz Sant Fransez,
Bet, er zeitekvat kantved, eur skouer a zantelez.

Birvi 'ree en he galon guir garante Doue
Ha d'ober vad d'he nessa oa douget braz ive.
Epad eur vosen heuzuz skignet e Montroulez,
Frer Loïz 'n em ginnigas 'vit sikour an dud kez.

Prestik, setu hen d'he dro taget gant ar vosen ;
Kinnig a ra he vue 'vit mad ar glanvourien.
Varlerc'h he varo euruz 'n em skignas ar c'helou
Oa bet græt meur a vurzud dre nerz he bedennou.

Dalc'homp sonj euz an deiz-ma, kristenien Plouezoc'h.
Poaniomp da lakât ennomp ar fe bepred krenvoc'h.
Ar fe hon euz resevet var font ar vadiziant
A zo deomp talvoudussoc'h eget aour hag arc'hant.

J. B.

(Job Bourdoulous)

IMPRIMATUR :

Kemper, 24 a viz Even 1913.

A. COGNEAU,

v. g.

